

30 vloaz a vara

30 vloaz zo e kroge Youenn ar Gall da werzhañ dorzhoù bara bio. 30 vloaz war-lerc'h en deus lezet e stal etre daouarn mignoned o deus kendalc'het gant ar memes spered.

E Kervegen, nepell eus chapel Kerzevod, e talc'he e dad-kozh un atant, bet roet d'e dad, ha dezhañ goude, e 1981. Met ne blijte ket dezhañ ar soñj ober war-dro loened korn war un 40 hektar bennak. C'hoant e oa gantañ lakaat e zouaroù dindan bio, ar pezh ne oa ket anat d'ar marese.

Tri bloaz goude e werzhe an dorzhoù bara kentañ, bara bio evel-just. Bloaz goude, e 85, e lakae ur veilh da vont en-dro evit malañ ar greun bet eostet war e barkeier, c'hoant gantañ mestroniañ ar chadenn, eus ar greun d'an dorzh. E 2005 en doa lakaat en e soñj gouestlañ muioc'h a amzer d'e zouarou, d'e deir meilh. Dedennet eo gant ar sevenadur hag ar yezh ha kemer a rae perzh e kaozeadennoù etre brezhonegerien aozet gant Brezhonegerien Leston'. Evit lidañ fin ar bloavezh-skol, e 2005, e voe pedet an dud da evañ ur banne er Ceili, e Kemper. Hag eno e reas anaoudegezh gant Bénédicte Putzeys, deuet en-dro da Vreizh, d'he bro – Douarnenez – goude bezañ bet o chom e Pariz hag e Bro-Velgia, hag hi enskrivet ivez e-touez izili Brezhonegerien Leston', el live kentañ. "Goude bloavezhioù a-zehou hag a-gleiz e oan o klask, gant ma gwaz, gwelet peseurt stal hon



Jan ha Bénédicte Putzeys

dije gallet adkemer." Ha graet an afer. Youenn Le Gall a chomo mestr war e zouarou, e Kervegen. En tu all d'an hentig e vo Jan ha Bénédicte Putzeys o ren bremañ war ar stal Barabio. "N'hon eus ket kavet gwelloc'h, ha berroc'h, anv eget hemañ." emezi.

Ar memes spered

Dindan 8 vloaz en deus ar

bet graet e Kemper gant laezh dastumet e Penn-ar-Bed ha n'eo ket gant laezh bio prenet e Bro-Alamagn. Lakaat an holen da zont eus Gwenrann. Ober gant bleud produet gant Youenn Le Gall, gwinizh, ed-du ha segal ha zoken 'epautre'. "Dav gouzout, memestra, e teu ar braz eus an ed-du a gaver e Bro-C'hall, 80% evit bezañ resisoc'h, eus Bro-Sina. Ne vez ket kavet kennebeut a rezin sec'h bio produet e Bro-C'hall." eme Bénédicte Putzeys. Setu perak e rankont mont betek al Loiret evit prenañ ar "petit épautre", ur seurt gwinizh gouez met peurvuiañ ne gaver outañ nemet e Bro-Spagn pe e Bro-Italia. Produñ bio a fell dezho met gant ma vo graet gant produioù ar vro, eo o fal. N'eo ken pa ne c'hellont ket ober mod all ma 'z eont pelloc'h da glask o produñ bio, ar greun lin en Normandi, an had tro-heol bio diblusket e mervent Bro-C'hall.

Kreskiñ

Gant an amzer o deus kresket ar seurtoù bara a ginnigot, 40 en deiz a hiziv, en o stal en Erge Vras met ivez en o staliou-kenwerzh, e koc'hu Kemper hag e Kerfeunteun, er staliou bio Bro-Gerne hag er Mor-Bihan. "Muioc'h-mui a dud a bren bara ganeomp evit o yec'hed hag o magadur. Ha p'o deus kroget eo diaes dezho distreiñ war-zu produioù all." a resisa Jan Putzeys. Eizh den a vez o labourat ganto, ar pezh a ra dek goprad en holl, evit produñ teir zonenn ar sizhun en o zouez,

dreist-holl, bara hanter-zibrennet T80, bara gant greun lin ha tro-heol pe c'hoazh bara melen. Tennañ a ra hemañ d'ar pasteiz, pe d'ar bara dous, dre ma vez ouzhpennet potimarron ennañ, produet gant... Youenn Le Gall. Hemañ c'hoazh an hini eo en deus staliet ur vilin-askell war e zouarou ha panelloù-heol war e savadurioù gant ar soñj produñ tredan da lakaat ar mekanikoù da dreiñ. N'eus nemet an tredan a re a vez gwerzhet goude da EDF. Eñ c'hoazh en doa toulllet an douar a-benn gellout kaout dour glan. "Un eien a zo dindan hon treid. Ha dour glan eo p'emaomp kelc'hiet gant parker gounezet en ur mod bio." eme Bénédicte Putzeys.

30 vloaz goude eo deuet ar mare da gaout soñj eus ar mare ma oa bet roet lañs d'ar bara bio e korn-bro Kemper. Met n'emañ ket Bénédicte Putzeys e soñj ober ur gouel evel ma bet graet pemp bloaz zo. "Re a labour a zo." emezi a-raok displegañ e ra ivez war-dro staliou, un dek bennak ar bloaz, evit bugale vihan skolioù an Erge Vras pe zoken evit ar skoloajoù.

Abaoe un tamm amzer ne gresk ket a-galz ar gouleñn war ar bara bio, abalamour d'an enkadenn "met ne zigresk ket evel ma o'hoarvez evit kalz micherioù. Setu n'hon eus ket da glemm." emezi. N'eus ket a raktres bras ganto met derc'hel d'o doare-ober, ober gant goell naturel, ober bara a galite, ober gant produioù ar vro ar muiañ ma c'heller, a zo brav dija.